

RESPON

d'ar Barz « DIR-NA-DOR » vit he Wî-Pask d'an Aot. Combes.



Tón yé.

1

Eul Laouenan dister,
Ken ourgoulluz a dek,
Pintet he lost en êr !
A zigor frank he vek,
A diwar eur goss Kroaz,
Drouk-wisket em Pabor,
He kân goaz vit biskoaz :
« Dir, Dir, Dir ! pa Na Dor ! »

2

Lorc'huz vel eun Derven
Gant daou berc'hen barnet,
(Eskenner (1), Korventen) (2)
Da veza diskaret,
He nij er Wenn gant mall
Da oapâd ar c'henta
A da rei d'he ben all
Tarbar deuz he wassa ;

3

Fuloret ! leun a c'hoez !
He skrij diboez he benn :
« Dre ma moez a ma foez
E chomo plom ar Wenn !
Eskenner m'ar teu tost
N'eo prim ar pez a glask,
Eun tamik sao d'am lost,
A setu he Wi-Pask ! »

4

Ag an tam koss loen fall
A frink a hij he... raer,
Gant Pintiklaoutet all
Uz penn an Eskenner,
War drem p'hini deuz krec'h,
Vel ma sao tam he fri,
He flistont, respet d'ec'h
'Lec'h wiou,... fank tom a pri !

5

A loustoni dallet
Heman 'renk souz a dren ;
An Derven savetaed
'Zao sonnec'h c'hoaz en Env !
Ag ar preon askellek
Gant he gorvat ijin,
He dro speredellek (?)
A drelat da c'hoarzin !
.

6

Met piou 'drelatfe ked ?
Na pa ne tam d'he goan
O welet kerz-ar-bed
En eur Wî Laouenan ! ?
An holl, êvruzamant,
'Oar a boe pell-amzer
Pelec'h ve he skiant
Gant eun dra ken dister !

7

Paot he Wî na zonz tam
En kozni an Dorgen,
Zo kleuz, tord a jilgam,
Brein-pour deuz an daou benn !
Na barz er Gorventen
Prest braz da zirolla
Ma teufe c'hoaz biken
C'Hwilet louz d'he zreina.

8

Mazaon, kanfard diboell,
N'hanvezaez mann er stad :
Derven gant bar-avel
Oe sklapet c'hoaz a blad ! (1)
M'ar stourmit evel-t-hi
P'o a dreuz ho keno,
El lec'h eun tam koss Wî,
Bili ag a spego ! ?

9

War eun dro, ar Wenn goz
A strako dre he c'hreiz !
Ag al lapouset-noz
A zifram Franz a Breiz,
Kaouennet, Brini dû
A da holl gonseurtet
Vo strinket tû deuz tû
Tre da Vro ar Gôt !

10

Eur seurt Allumen-Wiou (!)
Daoust vo tremenet Pask
Na yêlo ked a biou
M'ar kendelc'hit da glask ;
Ar Bobl so c'heûg diwec'h
Gant oc'h arvéou zod
A ma sao kroz a bec'h
C'hwi lipo ar vaz-yod !

11

Laouenan « Dir-Na-Dor »
A yêl gant he dud louz
Lec'h all da c'houll digor
M'ar gra re holl a drouz :
Dir-na-dor a doro
Pe 'blego, eun a zaou ;
Pe yêl lec'h ma karo
War lerc'h ar Zier-Glaou !

12

Gwech-all c'hwi 'rae kalz waz ?
Met breman, ni, d'hom zro
A zalc'ho mad d'ar vaz
Da laket urz er vro :
Na wiou-pask, na kroajou,
Bara-kân n'ag Aele,
Zent koat, na koss kojou
Na harzo kement-se.

(1) Monsieur Combes. (2) Suffrage universel.

(1) Le chêne et le Roseau (La Fontaine).

Gwelloc'h amzer biskoaz
 Neuz bed toez an dud kaez,
 A kalz kaeroc'h vo c'hoaz
 Pa vîot holl er maez :
 Da c'heûl koss burzudou
 Na ve met paourente ;
 Rak ho falz-douêou
 Goust goell ger maga 'n'hê.

14

Beteg hent 'peud sklejet
 An dud diboez ho fri ;
 Gant ho kêvier hadet
 Brezel a kasoni ;
 Stourmet deuz kerz-ar-bed,
 Deuz Frankiz, Lëaldet,
 Ag he refot bepred
 Ken a veoc'h holl torret !

15

Terri-ta ! pe blega ?
 Ne dal ked laret nann !
 Douja d'ar re grenva
 Pe skampa pell a c'hann :
 Ar Bendûen zentuz
 A chomo en he zâ ;
 Met an Dëro lore'huz !
 A renko peur blada !!

Dalc'h klenk-ta 'lêc'h ma m'an
 Da Wi-Pask (?) c'Hwil-dëro (!)
 Gant aon pe diwar-n-han
 Eur frigassen stripo !!
 Rag ma z'euz Choûantet,
 Re lemm oc'h ivino,
 Zo Republikanet
 Dibrenn ho c'hollero !

DA ÈCHUI

Neuz-forz peger krenv ëo ar Wenn,
 Pa c'haeffe dezi d'ar pâ-l-krenn,
 Deuz red, gant an horz ag ar yenn,
 He c'hrello zûr dre benn pe benn...
 Ar Wirione, ar sklaerijen,
 A gasso prestik da bourmen,
 Gant ar Gaou ag ar falz-kreden,
 An dud noazuz, au dreïtourien !

Moez ar Bobl ëo a c'hourc'hemen :
 Vo red dê douja d'al Lezen
 Pe distroada vel an Derven
 Pa ve zôdet ar Gorventen !
 Na pa vefte deuz ho difen
 An holl lapouset kofik-gwenn,
 Barnet, en despet d'ho c'hrôc'hen,
 Barz er vro-man da virviken !
 Amen.

CH. ROLLAND.

Gwerituz... Ehel 1903.

RESPONT D'AR BARZ YAN-AR-FLOC'H

(War he dôn PILLAOUER).

1

Er wech-man stâl ar burzudou,
 Paotret an devalijen, (*biz*)
 Despet d'an diaoul a d'he gerniou (!)
 O deuz kavet c'harp c'ho fenn ?

DISKAN :

Foeï, foeï, foeï ! da stâl ar bourdou
 Arao ! war ar c'hwilet louz !
 C'hoez ar foelt gant ho c'hoff stripou !
 A gant ho ardou marmouz ! (1)

2

Kaer ho d'euz drailla paterio
 Krozal, stourm diwar ho c'hlood, (*biz*)
 Labeza koss kazëtenno,
 Na spont ken foelt tam an dud ?

3

Dindan krabanou bulûmuz
 Ar brini lontrek c'hoez-fall ! (*biz*)
 'Oamp pell-zo en eur stad euzuz !
 Bennoz da Gombb a Vro-c'Hall !

4

Dindan pao an amprefanet
 Vijemp holl koeët prestik : (*biz*)
 Laket eun harz 'oa digoulzet
 Vit enor ar Republik !

(1) Que l'on daigne remarquer que je ne fais qu'user de leurs chers procédés et que l'on veuille bien m'excuser.
 CH. R.

5

Da beur saotri hor bugale,
 Da zerc'hel ar gaou n'he zâ, (*bis*)
 Eo he c'houll an dud didalve
 « Liberte ! » deuz ho goassa ?

6

Stad kam an tadou dizeme,
 Lard deuz c'boejen ar bobl kaez ! (*bis*)
 Honnez nê ked eul liberte :
 Chou ! Kanfarted ! prim er maez !

7

Dirak kounar an dud noazuz
 Ne raer tanfoelt vãn, m'en tou ! (*bis*)
 Neuz met tamou barzet flëriuz
 O Kana litanioù !!

8

Lëzomp ar brini da wa'hal
 « Liberte ! » leiz ho geno ; (*biz*)
 Ar barzet tangnouz da c'harsal ;
 A kanomp en eun danz-tro :

DISKAN :

Maro ëo feiz ar Sorsërien,
 Sklampet ar falz-doueoù !
 Aed an diveza libouden
 Da yenn en... raer an Ankou !
 Chou !

28 Avril 1903.